

202196 4. f. 4.

4. n° 10

CANTIQ SANT YAN-BADEZOUR.

Var eun ton nevez.

JESUS, Mab d'an Tad Eternel,
Salver ar bed universel,
Roit din ho craç hag ho sicour
Da gomz a Zant Yan-Badezour.

Zachari hag Elizabet
Voa e dad hag e vam hanvet,
D'an den voant exant a bep blam
Pa voant da Zant Yan tad ha mam.

Elizabeth a voa cos bras,
Hep beza bet bugel biscoas.
Mæs dre eur c'hraç dreist an natur
E concevas he c'hrouadur.

E guir priedou e vevent,
Humbl voant ha parfet evel sënt,
Bemde e suplient Doue
Ma roje déze bugale.

Pa voa Zachari en ilis
Oc'h offr da Zoue ar zacrifiç,
E tigassas, Doue an Tad,
Un æl dezàn gant qêlou mad.

2

Ebars en tu deo d'an oter,
E tisqennas ar messajer,
Hag e laraz da Zachari :
Ema graç Doue en ho ti.

Exocet eo bet ho peden.
Doue a ro deoc'h ho goulenn ;
Ho pried, qent nemeur ac'han ,
E devo eur mab hanvet Yan.

Ar mab-se a vo eur zant-bras ,
Eur precursor d'ar Messias:
Ar c'hraç en devo da velet
Nep a dle redima ar bed.

Gabriel a zisparissas ,
Elizabeth a goncevas
Eur mab etre he daou goste ,
Precursor d'an Aotrou Doue.

Pa voa Santez Elizabeth
O tougen Sant Yan beniget ,
E teuas ar Verc'hez Vari
Evit renta bizit dezi.

Mari a zouge d'ar c'houls-se
En e entraillou Mab Doue ;
Deut voa abers ar Speret-Glan ,
Da lemel ar pec'her a boan.

Pen devoa Mari saludet
E c'hininter Elizabet ,
Ha dicuet dezi eur joa vraez ,
Daou viracl caër a c'hoarvezas.

3

Sant Yan e cof Elizabeth ;
 Gant joa a gomanças lamet
 Evel pa vize d'an daoulin
 Da zaludi e Vestr Divin.

Ouspen e voa santifiet ,
 Delivret demeus ar pech et
 A ro deomp hon tad hag hor mam,
 Balamour da bechet Adam.

Piou ne gompreno qet ac han
 An excelanç eus a Sant Yan ?
 Grêt voa gant Doue eur zant bras ,
 Hag ên ne voa qet ganet c'hoas.

Pebeis joa da Elizabet ;
 Pa c'hanas he mab beniget :
 Cavet Jesus en e c'hichen ,
 Redemptor an natur humen.

Nemeus nep douet evit avanc
 E voa en ên rejouissanç ,
 Hag e cane an oll alez
 Da Zant Yan cantiqou nevez.

Pa zeo Jesus , Roue a chloar ,
 Deut eus an ên var an douar ,
 A ziscuele dre e bresanç
 Cals demeus a rejouissanç.

Zachari a voa mud rentet
 Balamour m'en devoa douetet
 Da gomzou an æl Gabriel ,
 Messager an Tad Eternel ,

4

Mæs Sant Yan pa zeo bet ganet,
Ar gomz d'e dad en deus roet;
Rac chetu amàn e gomzou :
Yan , emezàn , eo e hano.

Etre ar vugale malet
Zo biscoas gant groagez ganet,
N'en deus qet bet hepqen unan
Brassoch evit ma zeo Sant Yan.

Jesus-Christ pa voa var ar bed
Eo en deveus e lavaret ;
Me gred hor Zalver pa gomzou
A vezo credet hep testou.

Sant Yan biscoas ne ras pec'het ,
Ha ras pinijen bras bepret ;
Paourente , poan , humilite ,
N'en deus bet qen en e vue.

N'en devoa qen evit dillat
Nemet crochenniq un danvat ;
E deliciussa cheriou.

Voa dour sclær ha griziou louzou.
E vele voa an douar yen ,
E di ar meas , e bluec men ,
E dapis hag e lincelliou
Ne voant nemet spoe ha delliou.

E gompagnuez al loenet ,
Bleizi , moch-gouez ha leonet ,
E jardinou d'en em bournen ,
Coajou , drez , spern , dour ha bouillen .

5

Concluomp eta, christenien,
 Eo nécesser-bras ar binijen,
 Pa zeo eun den qen inoçant
 A zouffr qement-all a dourmant.

Sant Yan en dezert er gis-se
 Ne rê nemet pedi Doue,
 Ha gortos gant eun dezir bras
 Donedigez ar Messias.

Mæs pa voa arru an termen
 Da brena an natur humen,
 E quitas Sant Yan ar c'hoajo
 Evit mont da sermon dre'r vro.

Da laret d'an dud dizordren
 E voa ret ober pinijen
 Evit prepari an hentchou
 Da zigemeret an Aotrou.

Ar brud vad demeus e vue,
 E sqiant, e otorite,
 A rê d'an dud a bep canton
 Donet d'e glêvet o sermon.

E zellou a voa quer charmant;
 Qen douç e gomz, quer ravissant,
 Ma sonjent oll bian ha bras
 Penaos voa én ar Messias.

Bete memes ar judevien
 A zeputas o beleyen
 Evit mont da c'houlen ountan
 Hag ar Christ a rer anezan.

6

Mæs én en deveus respontet
 Ne voa na Christ nag eur prophet,
 Nemet eur vouez en eur dremen
 O laret ober pinijen.

Sant Yan eleach ma tremene
 Ouspen sarmon e vadeze ;
 Gant e gomzou e yent contant
 Da zench ha caout badiziant.

Pa voa o sarmon evellen
 E qichen bord rivier Jourdren ,
 E teuas Jesus e-unan
 Da veza badezet gant Yan.

Sant Yan en istant m'er guelas
 Ous e anaout en discuezas :
 Hemàn , emezàn , eo an Oan
 A lamo ar pecher a boan.

Hen zo bet deomp prometet
 Gant qement eus a brophetet :
 Chetu ainàn Oan Doue ,
 Hor Mæstr , hor C'hrouer , hon Roue .

Piou a gompreñas biscoas
 Humilite ar Messias ,
 Pa blijas gantàn er Jourdren ,
 Monet e renq ar bechérien.

Da effaci ar pec'hejou
 E ve grêt ar vadianchou ,
 Mæs Jesus , hag én inoçant ;
 A recevas ar vadiziant.

7

Chetu amàn traou surprenant
 Hag a ra din coll ar parlant,
 Guelet Jesus humiliet
 Dirac nep en devoe crouet.

Jesus, hor Mæstr, Roue a c'hloar.
 A zo prosternet d'an douar;
 Mæs Yan o rei ar vadiziant,
 Zo henoret evel eur zant.

Jesus a zo var e zaoulin,
 Hag én eur personach divin;
 Jesus a zo e plaç ar pec'her,
 Ha Yan zo e plaç hor Zalver.

C'houi, Sant Yan, p'o poa an honor
 Da vadezi hon Redemptor,
 A remerqas a ziouc'h e benn
 Ar Speret-Santel o tisqenn.

C'houi glêvas an Tad Eternel,
 Oc'h anzao eno e Vugel:
 Hennes eo va Mab, emezàn,
 Va flujadur a zo ennàn.

Sant Yan p'en devoa badezet
 Jesus hor Zalver beniget,
 A yas da bales Herodes,
 D'e vlam eus e aoultries.

Mæs ar rque Herodias,
 Ous Sant Yan en em goleras,
 Hag a ras dre suazion
 Laqât anezàn er prizon.

8

Pa voa ar roue eun devez
O leina e compagnuez,
E teuas merch' ar plac'h flaman
Da ober eun dans dirazàn.

Ar roue neuze a laras
D'ar verc'h-se da Herodias,
Goulen eun dra benac ountàn,
Hag e devize anezàn.

Gant he mam ar plac'h qelennet,
Pen Sant Yan e deus goulennet;
Troc'het voe er prizon e benn,
Ha roet dezi he goulen.

Sant Yan, bremàn ez oc'h er gloar;
Goude ho poan var an douar:
Oc'h assistanç a c'houleñnom;
O pezet sonch eus ac'hanom.

Hor prezervit ous teir goalen:
Brezel, gernez hag ar vocen,
Dre ho pedennou deiz ha nos
Hor c'hunduet d'ar barados.

F I N.

E MONTROULEZ, e ti LÉDAN, e tu ar Var.